

## SON VAR ZUJET AN AOUR

Ton : *Er Finister ez on bet ganet*

I

Ar brezel abaoe triwac'h Miz  
 A lak an douar da gren ;  
 Biskoaz na welched tra ken iskiz  
 Abaoe 'man ar bed 'n e za.  
 Sellit nag a dud  
 Ve gwelet bemde  
 Evel loened mud  
 Drailllet didrue  
 Hag oc'h astenn da viken  
 O c'horf war an dachen.

II

Piou a zo koz d'eur reuz ken spontus  
 Met Gwillom hag e gonsorted :  
 Pennou foll an Otrich hag ar Pruss  
 O doa c'hoant da c'houarn ar bed ?  
 Mez o zorchenou  
 Vo kaset da fall,  
 Rak an holl vroiou  
 A zaw da ziwall  
 O frankiz hag o douar  
 Gant eur galon dispar.

III

Goude 'ver kement eneb d'eze  
 Komprenit eta nag a boan  
 'zo evit dont abenn dioute  
 Ha da zistarda o c'hraban,  
 Daou ugent vla 'zo  
 Eur zonj n'o doa ken :  
 Atao klask an dro  
 D'hon brevi souden :  
 Gant ze 'oa lemm o armou  
 Ha leun o c'hanoliou .

IV

Siouaz ar starta deuz al labour  
 A zo ganemp-ni, tud ar Franz ;  
 Da gas mêz hon bro an dud treitour  
 Hon deus c'hoaz defot eun tam lanz  
 Kanoliou dre vil  
 Boulejou dre vern  
 Da sklapa a bil  
 D'eze war o c'hern  
 Ma chomfont holl gourvezet  
 War an douar kalet.

V

Seul vui a ganoliou a mefomp  
 Seul vui vo armet Yann zoudard  
 Seul neubeutoc'h a dud a golgom  
 Ha kalon 'vo da zerc'hel stard  
 Mes red è komprenn  
 E renkomp prena  
 Digant an estrenn  
 Kals traou da larda  
 An armou 'vit hon gwazed  
 Pe c'hoaz dillad ha boued.

VI

Nemet an traou-ze 'vit o fêa  
 E red kavet arc'hant hag aour  
 Dre-ze ar Franz a c'houenn bre  
 Digant ar pinvik hag ar paour  
 Dont a galon vad  
 Da harpa o bro  
 Pep den en he stad  
 Muia ma c'hello  
 En eur droka 'vit paper  
 An aour 'deuz 'n o zier.

VII

Bea 'zo tud aonik, war henvel  
 A gred c'hall ar billejou koll  
 'O zalvoudegez goude 'r brezel  
 Hag e vefent revinet holl :  
 Ar re-ze 'zalc'h kuz  
 An aour prisius  
 En eur goz loeren  
 Red 'vit dont a-benn  
 Deus an hailloned krisa  
 'Zo o klask o c'hrigna.

VIII

Pegen braz mez e ve d'ar re-ze  
 'Pad ma zo kalz a goue gant joa  
 Nac'h renta d'ar Vro ha d'an arme  
 Eur zervich na goust d'ê netra,  
 Mad a vije grêt  
 Da gement tosten  
 Ma ve refuzet  
 Ar peziou melen  
 Pere 'ziskouefe re skler  
 Bea chomet er ger.

IX

Beb tro m'o deuz bet renket skoâta  
 'Vit difenn ar Franz en danjer  
 Ar Vretoned 'barz ar renk kenta  
 'Deuz c'hoariet o fotred têr,  
 Diskouezomp d'an holl  
 Omp c'hoaz eur bobl vad  
 A oar reï he aour  
 Kerkoulz hag he gwad ;  
 Trokomp 'ta hon holl peziou  
 Evit ar billejou.

Pôtr Montroulez.

P

Jean DELAIS